

KIMIADOU EUR MARTOLOD A VREIZ

CHANSON NEVE

Var don : *An drouc-hirnes* (le mal du pays) *Cetu ar flik ar flok*

Bretonned, me o ped, disdostet da glevet
Eur c'himiad truezuz, eun adieu trist meurbet
A ra da guervois quen monet d'ar brezel
Eur martolod iaouank maguet en Breiz-Izel.

Arzei-varnuguent ar vis maë me oa en faction
Oar hon batiment bars e rad Toulon,
O hortoz partia vit mont d'an Italie
Oar ben iez de goude, e cleemp ambarqui ;

Me gred a oa tremenet an heur a hanter noz
A ma c'hamaradet a oa en o repos
Netra a drouble neuze ar silañ d'euz an noz
Met ar mor o vurmuri gant eur voez rust a groz.

Ma daou zorn a oa c'harpet oar ma c'harabinen
Dindan ma zreid ar mor bras ac an év ouz d'am ben :
Heusi ran va vignonet pa deuan da gompren
Na ve tre 'n den ac ar mor nemet treus eur planquen.

Pa n'em velis ma unan oar bont ma bâtimant
Ep test deuz ma glac'har nemet ar firmamant
Me gommanças hirvoudi gant glac'har ac anquen
Pa deuas da jonj din a barous Trabien.

Ma daoulagad a oa troet oar zu ar vilagén
Lec'h a ma guele ar sclerigen
A pa deus da sonjal em c'heren hac em bro
Gant an dour deus a mor n'em vesque ma doëro

A boe an devez fatal a meus renket kuitat
A dont da guimiadi deus ma mamm a ma zad !
Bep noz pa ven e cousquet em huvre o goëlan,
Ac o sonjal n'ho glac'har noz a de o ouëlan.

O devez leun a c'hlaç'har, a sizesper e hoëro,
O devez deplorabl a cargnet a ganvio
O quiniad anqueniüs a glac'har meurbet
Me mo jonj ac hanout gueit a vin voar ar bet.

Gant ma c'herent er guer e ma nec haman
Hi ra ma oll chagrinn a ma brassant tourmant :
Penosannonci de c'han breman d'ar brezel
Aoun a meus d'ho lacat gand an nec'h da vervel.

Pa glevont quement se a devont calonad
Goassoc'h vit an devez a renquis ho c'huitad,
Ac hi devo courag oalc'h vit gallout supporti
Ep ma ranno o c'halon gant eur c'helo quen cri:

Houi sperjo evurus, o saent a saentezet,
Itron-Varia-Doue, ma guir vam biniguët,
Roit de ners a couraj un ho affliction,
Reit de ho assistanç, confortet ho c'halon.

Pelec'h eo et breman querent a mignonet,
An amzer-ze quen douç hac agréabl meurbet,
Pelec'h eo et breman an amzer evurus
A oan en Trabien en ho toez bemde.

Nijet eo pel d'ouzin an amzer quen eureuz,
A oan assambles guanac'h camaradet joaüs,
Tremenet evidon, marteze vit james,
An eur vad hac ar joa m'em tanveet assembles.

Pe zeui an nevez amzer da gargan a dare,
Ar guez a vlenno kaër ac a zello nevez
la zeui e voar e c'his ar guenined er vro,
Na nimp mui assambles beb sul d ar pardonniou.

Pa oan en o touez oan joaüs a laouën
Mæs breman c'hon mantret gant an anquen,
A ma oll plijadurezo bout neur plaç distro,
O sonjal gant glac'har em c'herent ac em bro,

Houi a velfe breman Yvonnec ho mignon ;
O pourmen e unen voar ar rad a Toulon,
O pourman e unan alies tal an nod
A daëro he zaoulagad a red voar e ziou chod !

Me ve c'hoas alies aseet oer eur roc'hel,
Ma daoulagad troet var zu Breiz-Izel,
Mantret gant ar glac'har, a beute em daëro,
O sonjal em c'herent zo er guer en canvo.

O douar Breiz-Izel, o ma bro biniguët,
Pegouls a zono an heur ma c'hin d'ho kuelelet ?
Pegouls a errue ar momet ac ann de
A zeui da laquat fin d'am c'haptivité ?

O devez leun a zouster, devez a eureustet ?
Me zo e sonjal ennout bep heur a bep momet
Dous trugarezuz, hastet ar momet-sø
Ma c'hin c'hoas da velet ma bro a ma c'hontre.

Tre me oant o teplori oar bont ma batimant
Ar loar a darzas souden ebars ar firmamant ;
Neuze me a velas eus d'am fen o nijal
Eur guenidel bian evar zu Breiz-Izel.

O ! prest din-me eonic prest da zivesquel,
Ma nijin ex plaç da betec Breiz-Izel.

Da gonsoli ma herent quen vit quitat ar Franç
A da gas betec eno comzo a esperanç
Mes allas ! me n'hallant quet veldout treusi an oer
Me a renk chom ama evel eur prisonnier,
Evel oa goechal an Israëlitet
Pel amzer o hortos an douar prometet.

Martese teus eonic scuisset da zivesquel,
O nijel dreus d'ar mor, o ton deus eur vro pel
Pleg eta da esquel a so bet digor,
A repos eur momet en quichen mab Arvor.

Disquen eta, eonic, eur momet em c'hichen,
Ma scrivin eur liser da Trabien,
A pa meus quet vel dout ar bonheur dont d'ar guer ;
Te vo, eonic bian, vidon eur messenger,

Querquent evel ma vi digaset en Breiz-Izel,
Te vo, eonic bian, ma messenger fidel,
Te rei ma gourc'hemen er guer pa errui,
Hac a laro d'am zud a c'han d'an Itali.

Gret ma gourc'hemeno d'an tad neus ma maguet
Mæs allas ! d'am mêm paour, da bones na ri quet
Rag hæ zon partiet demeus a Vreiz-Izel.
Eo et da jouissant deus ar gloar eternal.

Lar adieu d'am breudeur a d'am c'hoarezet,
Goude d'ar bellec coz a neuvez ma badeet,
Na ancoue hini bet deuz ma mignonet
A lar de a sonjan hene en bep momet.

Lar de eonnic bian, pedi vidon bep nos
An Itron Varia, patronez ma farous,
Ma teui d'am preservi en creis an dangerio.
A ma rei d'in ar c'hras d'a retorn c'hoas d'am bro.

Mar teufe dit c'hoas, pa vi en Breiz-Izel,
Da rencontri eun devez, ma mignones fidel.
L'ar dei a spo gueleit Yvonie, e mignon,
Hoher gard enn nosves, oar e leat, e Toulon.

Assur dezi er fad dre proposiou touchant,
Meus bepred eviti eur garante ardent,
Lar dei a c'ha breman ma c'horf d'an Itali,
Mæs ma c'halon a vo d'a virviquen ganti.

Pa zei an nevez amzer, te iel alies,
Da gana da fredoni da quichen he frenez ;
Perac ne allan me nijel eur vech uelloc'h
A mont da zaludi betek e si veldoc'h.

Mæs gra ebars em flaç a lar dei dre da zon
Derc hel jonj da viquen demeus er guir mignon,
Pec'hini zo atlas ! pell deus Vreiz Izel
En eur lest oar mor, foetet gant an avel.

Pa vin en Itali, eo creis ar c'hombajou
Creis an tan, ar mitrail a gros a c'hanonio,
Neuse eo a teuio ar muan jonj din,
Deus an amzer eureus zo nijed pel diouzin.

Mar teu din da vont tied gant eur bouled traitour,
Hag achui ma deio en eur vro estranjour,
Neur goean d'an douar c'hoas quen evit mervel,
Ma daoulagad a droo var su Breiz-Izel.

Ma daoulagad a droo var su Breiz-Izel
Da laret d'am c'herent eun adieu eternal
Da laret d'am mignonet eun adieu divesa.
A queu a bonheur d'en em velet bars ar joa.

Mar a velfet eun de, neur len a gazeten
Ma hao sivoas d'in voar bultin ar maro
Querent a mignoned, c'hui laro gant glac'har :
Gras dean digant Doue da repos bars er gloar.

Quen evit fluissa goulomp digant Doue,
Vit martolod kez, pep sort prosperite.
Pedomp a wir galon Roue an armeio.
D'em preservi en creis quement a dangerio.

Offromp c'hoas on veio da Stereden ar mor
Vit an oll soudardet deus o bro gær Arvor ;
Goulomp gant confianc pedomp-hi gant ferveur,
Da bellad diouta beb goal chanç a goal heur.

Rentomp melodiguez da arme gær ar Franç
D'hon prinç quen generus a leun deus ar vaillanç
Pere guita o bro vit mont da combatti,
Evit independanç oll bobl an Itali.

Canomp brema n'eur voez, canomp tout assembles
Ra vezint enoret a meulet da james :
Canomp ta Bretonned, deus lonç ho c'halono,
Gloar ac enor d'ar Franç ive d'hon armeo !

Nep a neuz composet ar son-ma pen-da-ben
So ganet a maguet en parous Trabien,
A neus e c'homposet voar an ton dic'hana,
Canit hi ta Bretonned vit n'em divertissa,

(Propriété de l'Editeur)

Kimiat eur C'honscrit

Var eun ton nevez

Va c'halon a zo frailliet dre nerz va ankenio :
E daoulagad entanet ken a zaero
Allas ! deuit eo devez ma renquan dilezel
Lec'h kaer va bugaleac'h ma bro dous Breiz Izel,

Adieu did va si balan war ar leinieg argrec'hen,
Tachennik c'hals war pini buguel e c'hoarienn,
Gwez ivin ker bokenneg en dizoel deuz pe-re
E pad tomder an envou, e kousken da greis-te

Adieu ma mam a ma zad, breman n'esperit mui
E chomfe ho mab caret vit harpa ho kosni !
Vit pourvei d'ec'h bara vel ma deuz gret dezan ;
A lezen zo didruez, ho kuitat a renkan,

Nag a vech ma man dener, e renkenfet gwela
Ha zeui var c'hran keniet ouz oc'h d'am em frotta.
Ha wellet bars en oal ed va skabellik gollo.
Har c'henvid o zeui deus fenubes dero.

Adieu, bered a barroz, douar biniguet.
A c'holo va zadou coz gant doue bet galvet :
Da wel an anaoun klemmuz, n'in mui war o pezio,
Da scuilla an dour santel mesket gant va daero.

Adieu, ma muia-karet, va douzik koant Mari ;
Eur blanedenn diremet a zen d'ho glac'hari ;
Ho eureuslet ho joaio skeudus zo tremenet,
Vel ar goumoulen, skanvik gant un avel kaset

Na welin ken da lagat ken lemm a ked leven
O virvi a plijadur, du-ze pa erruen,
Da zornik wen distak o kas a c'har en dro
Da vouez ken dous na glevin o kana va gwersio.

Pa oamp er c'hastekismou, hon daou c'hoas bugale
Hon c'halonno tenerik dija en em gleve.

Dirag Gwerc'hes a c'hroas-hent nag a wech â touejomb
Na erruje birviquen disparti entrezomp.

Iaouanq ha dirzousius allas ! ne wiemp ket,
Pegement a ankresio er vue zo mesket,
Ewitomp ne oa neuze lezenno na roue,
N'anveemp merd eur lezen, hini ar garante.

Adieu, va nez amezec, Iannic, va gwir mignon,
Kamaraded va c'hoario breur dre ar galon ;
Piou ziouaz ! a guemero eur lod deus ma foannio ;
Pion, breman, pa vin seder, gant-e me a c'hoarzo ?

Hep da vreur te iel breman e parosio neza,
Da bizitat al leuriou, bars al lazo dorna,
Hep aon, te iel da zisput maout ar c'hourennadek
Da zacha war e seien, e bars ar varedek.

Adieu, va c'hi kez Mindu ; va leal kamarad,
N'effomp ken deus ar beurre da glask roudou ar c'had,
Na glevimp mui er mene da chilpaden kaltrus ;
War var dorn mui ne zantin da deod karantezuz.

A benn eun neubeut amzer kals a vignoned ien,
Bars ar zoudard divroed, m'oar vad, de sonjant ken
Mes da galon-te Mindu ; n'eo ket ken enkouez :
Pell e ri c'hoas va c'hanvo dre da tezo klemmuz.

Adieu, va c'hazek velen, skan evel eun heïez,
Mistr evel eur logoden, koant evel eun oanez ;
Ne d'zantin mui dindaannou, gant aon hast o tripal
Ma daouarn, mui na stogfont o zeien var da dal.

Adieu holl plijadurio, foario, pardonno ger
Soubenno lez, noz-vecho, fest, leurrrio neve,
Embado, ker birvidic, binlo stard ar skintin,
Na drido ken va c'halon gant da zonnio lirzin.

Adieu kement a garan, adieu da virviken :
Pell deus a Vreiz me varvo, mantret gant an anken
Beals cus plante kisad k da chom lec'h m'int krouet,
A weler o tisec'ha raktal m'int divroet.

(Propriété)



PEDEN AR MOUSIK BIAN

D'AR WERC'HES

Var don : Potret Plouilliau, Kan 75°

Ma mammik guez ha ma ferson
A lavare d'in bemde
Ho pedi a greiz ma c'halon
A da noz a da veure
Ma chelaouet Gwerc hez santel,
Evit mamm ho kemeran,
Eur zellik hep quen. ia, eur zell
War ar paour Mouzik Bian !

An evnidigou pa greskont
A ia er mez euz ho nez,
Da guentan gant aoun e nijont :
Ho mamm zo var ho evez
Pel man ma mamm Gwerc'hez santel.
Evit mamm ho kemeran :
Eur zellik hep ken, ia eur zell
War ar paour Mouzik bian !

Pa meus bet lavaret kenavo
D'am mamm guez var e guele :
« Pegouls, emheie e vi distro ? »
Ma mamm baour a wele
Dinec'het hi Gwerc'hes santel,
He foan eo ma foan brassan ;
Eur zellik hep ken, ia eur zell
War mamm ar Mousik bian !

Ma c'hoarik vad ma c'hoar Anna
A iel d'an iliz bemde
D'ho pedi c'hoaz, Itron Varia,
Vit ma zad vidon ive,
Chilaouet Guerc'hez santel,
Eun ine diouz a gwellan :
Eur zellk hep ken, ia eur zell
War c'hoar ar Mouzlk bian.

Pa iem da laret hon pedén
Hon daouigou d ho chapel
Ma c hoar lare : « Sell eun dolen
« Var-n'hi ar Werc'hez santel
« Hag a c'hoarz ouzimp gant true ?
(A homp en oad teneran)
« Ma zellet ho ma breur ive
« A paour kez Mouzik bian ! »

Enn ho tolen, o Gwerc'hez kaër,
E weler ho mab Jezuz,
War ho tivrec'h buguel dister,
Ken mad ken karantezus,
Ho mad dinac'h petra ne c'hall,
D'ac'h mamm ar c'halloudekan,
Gallout a c'hellet da diwal
Ar c'hez paour Mousik bian !

Ma mamm a laret din aliez :
Eo mestr a bep tra Doue :
Mes Jesus zo mab a Gwerc'hez :
Petra n'hell mamm eur Roue ?
Ma diwallet Gwerc'hes santel,
Evit mamm ho kemeran :
Eur zellik hep ken, ia, eur zell
War ar paour Mousik bian !

Propriété